



## CANTIC SANTEZ AGNES,

PATRONEZ AR MERCHED YAOUANQ.

Var ton : *Sacris solemnitis.*

1.

**E**NTREZOC'H, tud yaouanq a gar ar burete,  
Ar ventoz angelic a blich calz da Zoue,  
Clêvit cana'r vnez eus a Zantez Agnez  
En despet da Zatan a zo maro güerc'hez.

2.

Demeus ar guêr a Rom e voa hi guinidic;  
He zad, he mam a voa ha-nobl ha pinvidic;  
Hoguen o merc'h Agnes na estime netra  
Nemet Passion Jesus ha dont d'en imita.

3.

Evel ma cōmmanças da anaout un Doue,  
Dezàn prest ec'h offras he c'horf hac he ene,  
Ha dont da c'bar vœu eus a virginite,  
Evit e zervicha fideloc'h goude ze.

4.

En pada zac'uzec vloasefell d'an-drouc-speret  
E quittäje he vœu ha-gemeret pried,

Quittât he devotion, heuill maximou ar bed,  
Evel ma voa ar c'his eus an demezelet.

5.

Un dijentil yaouanq a voa mab d'ar prefet,  
O veza bet charmet o velet he guenet,  
E creiz ar ru er Rom Agnes a rancontras,  
Hac evit e fried dezi en em offras.

6.

Agnes ouz e glêvet a gommanç da grenn,  
Hac evel diouz eun aër a dec'has diountâ:  
Eteo eus an ifern! pella prest, emezi,  
Cavet meus eus pried hervez va faltazi.

7.

Birviquen em buez dezàn ne faziàn,  
Rac eus ar priedou ez eo én ar goellàn;  
Beza eo pinvidic, nobl, mad, pur ha parfet,  
E dad eo va Doue, hac én Salver ar bed.

8.

P'oe gbelet ar gourach eus ar verc'hez Agnes,  
E voe prest accuzet da veza Christenez,  
Da veza soroerez, un demezel mechant,  
Hac a verite souffr peb poan ha peb tourmant.

9.

Ar prefet e galvas hac e fedas meurbet:  
Agnes, va mab Sympron qemerit da bried,  
P'otramant d'al lec'h fall e riot condaonet,



Hac eno dirac oll e collot ho cuerc'hdet.

10.

En noas a ben-da-ben e viot divisqet,  
Hae er stat-ze dre Rom e viot cunduet,  
Ha goude d'al lec'h fall etouez ar galantet,  
El lec'h ne guesot sicour, pa viot êruet.

11.

Ar Zantez, hep spona, a respontas dezàn :  
Dá Jesus, va güir bried, bigen ne faziàn ;  
Roet en deus un æl evit va frezervi  
Diouzoc'h ha diouz qement a zeui d'am attaqi.

12.

Neuze ar barner infam Agnes o gondaonas  
Da veza divisqet ha cunduet en noas  
E Rom dre ar ruyou, hac ac'hano casset  
D'al lec'h fall, etouez tud brutal vel bouc'het.

13.

Mes Jesus, he fried, souden a bermetas  
Ma cresqas pront he bleo, perç he goloas,  
Bete ma voe casset d'ar zal-a infamite,  
En esper coll he enor hac he virginite.

14.

Pa voe destumet eno evit coll he enor,  
Pini a estime mui eguet mil tenzor,  
Eun habit guen a gavas evit en em visqa,  
Hac un æl en e c'hichen evit e delivra.

15.

Ractal var he daoulin Agnes en em strinqas,  
Ha Jesus, he fried, a galon a bedas  
Da gonserv e enor, permeti ma varvje  
Qent eguet offanci biqen he furète.

16.

Pa voa Agnes güella oc'h ober orêzon,  
Ec'h antre libértinet brutal ha dirêzon  
Da zônjal ober dei coll he virginite  
Ha consanti gante d'o oll brutalite.

17.

Mes pa veljont ar zal c'arguet a sclêrijen,  
Agnes var he daoulin, an æl en e c'hichen,  
E coutejont d'an daoulin da c'houlen oll pardon  
Ouz Doue hæ Agnes eus a greiz o c'halon.

18.

Evel ma voant sortiet en eur veali Doue,  
En eur gêves o faut hæ o zemerite,  
An dijentil yaouanq Symphron a autreas,  
Ha violh Agnes souden a brederas.

19.

Mes d'an neb zo fidel, Doue ne vanq james,  
Rac se e conservas e vir servicherez;  
E qichen he zreid an æl en discaras,  
Hac eno var ar plaç maro mic er mougas.

20.

Pa glâvar ar Prefet e voa e vab mouguet,  
Gant eur goler harrufl e leu en eur redet  
D'ar zal da gaout Agnes, o crial aboes penn :  
O sorcerez milliguet ! ô qef eus an ifern !

21.

Perao oc'h eus-te lazet va mab m'via-caret,  
Hep cavet d'e ligne na dezan nep respect ?  
Saceras, eme Agnes, ne meus-êa qef lazet ;  
E vrutalite infam en devez e gollet.

22.

Ar Prefet digoleret Agnes a supplias.  
Ressuscitit va mab, ma ellit, var ar plaç.  
Sortiit eta, emezi, rad ne verilit qef  
E ve en ho presanç ho mab ressuscitet.

23.

Incontinent d'an daoulin dirac Jesus, e fried,  
E presant he reget gant comzou calonec :  
Jesus, va e'harantez, roit buez, m'ho ped,  
D'an dijentil maro da anaout e boc'het.

24.

Pa edo güir goella oc'h ober orêson,  
An æl a ressuscitas an dijentil Symphon,  
Pipi, incontinent ma voe ressuscitet,  
A lavarâs a grenn adieu da bep pec'het.

25.

Ouz Doue da guenta e c'houlennas pardon,  
Ha goude ouz Agnes eus a greiz e galon,  
O crial a boes penn : pardon, va Doue, pardon;  
Pardon, Agnes, pardon d'am pec'het dirêzon.

26.

Pa velas ar Prefet e vab convertisset,  
Gant arrach e condaon Agnes da veza losqet ;  
Pa voe taolet en tan, an tan en em-rannas,  
Hac hep touch ouz Agnes calz a dud a losqas.

27.

Goude voe cunduet da veza dibennet :  
Ar bourreo o crena, he sqei ne grede qet ;  
Mes hi ouz e bressi a lavaras dezàn :  
Evit Jesus, va fried, mervel a zeziràn.

28.

Qen buan ar bourreo, den cruel hac ingrat,  
Gant un taol coutelassen e beuzas en he goad ;  
Ac'hane gant an ælez en êvou cunduet,  
En vad a drizec vloas da veza eurunet.

29.

Souden goude ma voe corf Agnes entêret,  
Ec'b aparis d'e c'herent gant calz a zentezet :  
Bezit fidel, emezi, me a zo eurunet  
Gant va fried Jesus etouez ar güerc'hezet.

30.

Cetu fin eur femelen a gare ar burete,  
Beza bepret en joa en dra bado Doue,  
Gant ar Zent, an Ælez, ha gant ar Güerc'hezet;  
Birviqen da james. Doue ra vezo meulet

31.

Petra zònjit-hu bremâ, plac'het losq ha frajil,  
Henvel ouz Cathel Gollet dre actionou vil,  
Pini a gri arrach en ifern en tan bras  
Evit he impurete hep esperi caout graç.

32.

Petra zònjit pa velit un demezel yaouanq  
En ead a drizec vloas o souffri pep tourmant,  
Qent eguet m'otreje offanç he furete :  
Mar doc'h fur, grit evelti, hac e goelot en êe.

33.

Mar doc'h bete vremàn evel eur Vadalen,  
Elec'h imita Agnes, eur bec'herez monden,  
Chenchit, grit pinijen ha goulennit pardon,  
Hac e viot pardonet o c'houlen a galon.

34.

Courach eta, m'o suppli; courach, oll dud  
yaouanq,  
Coulz ha Santez Agnes andurit pep tourmant;  
Combaitit bete'r maro evit ar burete,

Hac e viot curunet pa rentot hoc'h ene.

35.

Qemerit Santez Agnes evit advocades,  
Ha sonjit en he buez, pedit-hi alies.  
Hac e vo eur voyen da veva pur ha net,  
Da veza er Barados coulz hac hi curunet.

FIN.



---

E. Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.